



Ar vuhez gwezhall

KLASK KELEIER

Evit respont d'ar goulennoù, klask ar respontoù war ar pajennoù merket.

	Sell ouzh ar bajenn
1. E-men emañ Poull-Fetan ?	1
2. Petra zo war toenn ti Louise ?	2
3. Pelec'h e veze keginet ?	2
4. Pelec'h e kouske an dud ?	2
5. Pegoulz e veze graet krampouezh gwezhall ?	2
6. E-men e veze gwalc'het an dilhad gwezhall ?	3
7. Peseurt boued a veze roet d'ar moc'h ?	5
8. Penaos e vez c'hoariet gant « ar ranig » ?	8
9. Petra a veze graet gant ar c'houarc'h ?	5
10. E-kichen peseurt stêr emañ Poull-Fetan ?	1
11. E pelec'h e veze kemeret an dour ?	2
12. Peseurt ment eo ar saout brizhdu ?	4


Evit gellout respont gwir pe gaou, sell ouzh ar pajennoù merket.

	Gwir	Gaou	Sell ouzh ar bajenn
1. Ne veze ket a zour-red en tier gwezhall.			6
2. Prenet e veze amanenn ha laezh er gourmarc'had.			6
3. Lazhet e veze ar moc'h en ti-feurm.			6
4. Micherourien e oa an darn vrasañ eus an dud e Breizh gwezhall.			1
5. Gant dour e vez graet amanenn.			4

Lenn skeudennoù

	Sell ouzh ar skeudennoù er bajenn
1. Peseurt dafar e ranker kaout evit ober krampouezh ?	2
2. Penaos e veze kaset an dilhad d'ar poull ?	3
3. Penaos e veze tennet an dour eus al liñselioù ?	3
4. Peseurt dafar e veze ret kaout evit ober amanenn ?	4
5. Penaos e veze goroet ar saout gwezhall ha penaos e vez graet bremañ ?	6-7
6. Penaos e veze troc'het ar gwinizh gwezhall ha penaos e vez graet bremañ ?	6-7
7. Pet kilhenn zo e c'hoari « kilhoù kozh » ?	8
8. Peseurt liv eo ar saout brizh-du ?	4

Gerioù-kroaz



- | | |
|--|--|
| <p>1. Boued ar Vretoned poazhet war ar billig.</p> <p>2. An dud a gouske e-barzh gwezhall.</p> <p>3. Ledet e vez toaz ar c'hrapouezh gant ur ...</p> <p>4. Poazhet e vez ar c'hrapouezh warni (kemmet).</p> <p>5. Lec'h ma veze gwalc'het an dilhad.</p> <p>6. Ar pezh a veze lakaet war an toennoù.</p> | <p>7. Evit kas an dilhad lous betek ar poull (kemmet).</p> <p>8. Ar benveg implijet evit ober amanenn gwezhall.</p> <p>9. Boued graet gant kig ar moc'h.</p> <p>10. Un ostilh evit troc'hañ ar gwinizh gwezhall.</p> <p>11. Danvez roet gant greun ar gwinizh.</p> <p>12. Al loen a vez goroet evit kaout laezh.</p> |
|--|--|